

KLEMOU

Eur Plah Manket

VAR UN TON TRIST

Selaouit brema va moez va hamaradezet
 Houi pere em yaoankis e meus bet cals caret
 Eus a doulit ha ludu me ra deah va klemou
 Deut oll assambles gani ka versea ha taelou

Me meus kolet brema ma reputation
 Ma halon a zo karget ha zezolation
 Dre ma meus kredet siouas la fos camaradou,
 E meus collet ar haerra demeus va bouqeou,

Befeg vrema me hallai larea vouez buel,
 E vohan kerra femeulen a oa en breizizel
 A brema me zo hudur en toezi an ol verhet
 Pa eo va haerra bouquet siouas gani collet

Henes oa karrea tenzor e oa barz er bedma
 Ne gavin ket henep leah da brena sort deza
 Dre veza deut da gredi camaradet traytour
 meus lezet va bouquet da vonet gant an dour

Pa dean d'examina ar voul rond deus ar bed
 Siouas me vel varnaizi brema calz a verhet
 Pere zo kolet gantai coulz a me ho rozen
 O veza deut da fiout en comzou treitourien.

Va oll gerent zo siouas gani dizinoret
 Va chans zo dinatur va flaneden kalet
 Va halon zo en irvout coulz en noz vel en de
 Me a houlen ar maro vit disqen em be

Goudai va frajilitai me zo oll an keniet
 E compren barz stad trist pihini on rentet
 Beteg brema me meus bed douget kokardeno
 Brema e meus eur bissar eur vas da vont e dro

Beteg an noad a ugrent vla me meurbet bevet
 Ebarz en doujans Doue evel ma voa gleet
 Neuzai me voa caret gant an oll em hantan
 Neuzai camaradezet voa la oen va halon

Goudai ne meus betheulet kouls en nos a ende
 Ar goel gompagnuez a voa barz em hontrai
 Dre se me zo mepriset ebarz en breuzel
 Va evrustet er bedma zo et gant an avel

Ne meus ket heuillet siouas avis fad na mam
 Dre ze ne meus get galet beya ive divlam.
 Groet e meus skouarn vouzar pa gleven anai
 Koulkoudai deus bet laret ar virionais dimai

Lavaret zo bet dime gante sur aliez,
 E heul goel gompagnuez mijje tristidigez
 Mes dre ma oan yoanc veprisen ho homzou
 A ze ra dime brema scuil eu mor a zaelou

Ma mijje bet ho hredet keuliet ho gourhemen
 Ma buez kamaradezet vije bet laoën
 Mes pa meus qet sentet brema demeus ar stor
 Allas vit deus ar garec e ranki ober zur

Noz a de he mon en neur stad trist meurbet
 Avichou me un tam da zibri goechal ne ve ket
 Goudai ma ve erh a scorn yen bras an avel
 Keuneut na mo qet dober tan da doma ma bugel

Houi va hamaradezet goude va oll anqen
 Deuio hoas dam goapad gant eur galon laouen
 Mes ma kemerit an hent pehini zo danger
 Houi pezo eveldon da zougen eur beh poner

Allas kamaradezet daou hent zo er bedma
 An hini gemer an hent mad neus da zougen beh
 Nepagemer an hini falbale voar va roujou [scan
 Neu eun poner da zougen a kals a dourmanchou

Vit var ma choue brema zo eur beh poner
 Hag a meus deus e zougen cals a boan a miser
 Dalhet vezin den douguen beteg fin va deiou
 Adieu dan yaouankis ha dam pljaduriou